

## DISPUT

ETRE EUL LEONARD HAC EUN TREGUERIAT.

*Var un ton ancien.*

**M**AR plich ganéc'h, selaouit hac e cléfol cana  
**M**UR chanson so composet a nevez er bloa-mà,  
 Zo grêt da zaou zen yaouanq o devoa speret mat,  
 Ebars en hostaleri oc'h eva boutaillad.

Al Leonard a c'houlén digant an Tregueriat :  
 Lavar din-me, va mignon, ha te so ur pot mat ;  
 Evidon-me so agil, ouspen oun mat a grog,  
 Rac souben vad a meus-me, alies te pe yod.

Ha me, eme'n Tregueriat, a so soubl a goublou,  
 A voar larda va gouzoug gant ar gram-poezennou :  
 Va yod a zebràn ivez alies coulz ha c'houi ;  
 Mar oc'h eus c'hoant da gregui, sortiomp eus an ty.

Nonpas, eme'l Leonard, lezomp an traou-se tout,  
 Hac evomp peb a vanne da rinça hor gouzoug :  
 Ne blich qet din ar gannou, ispicial pa velàn  
 Va goad o tont da redec, e teuàn da fatica.

Control, eme'n Tregueriat, pa vezàn malicet  
 Ne ràn fors evit guelet va goad sur o redec ;  
 Potret Treguer zo agil, tout ec'h ouzont lampet,  
 Neus netra ouz o ampech, bian eo o lavrec.

Ne choqit qet Leonis gant o bragueyer bras,  
 Rac traou eus ar modesta e zint, mar boe biscoas;  
 Neus nicun qer caer guisqet en escopti Treguer  
 Evel ma zeo Leonis gant o dillat mezer.

Guir avoalc'h a leveres, mat eo sur da rêson;  
 Mezer brao so en Leon, mes grêt int difêçon;  
 Guiscamantchou Leonis a gavàn divalo,  
 An trifars eus ar goaset a guz oll o bragou.

C'houi entrezoc'h, Tregueris, ho pragueyer so ourlet  
 Evel ma vent mailluret en dro d'ho tiou vorzet;  
 Ho chupennou so flanchet, ho tocou so campet,  
 Casimant e zoc'h envel demeus ar soudardet.

C'houi entrezoc'h, Leonis, oc'h eus rochedennou  
 A so grêt evel sier da zouguen sac'hadou;  
 Ho plêo a so biscoulet, ho tocou distroncet  
 Da zioüal ho tiouscouarn, rac aon vent chasset.

En ân, pa ve pardoniou, me a zo bras souezet  
 O velet merc'het Treguer penos e zint guisqet:  
 Tout o deus dantelezou en dro d'o c'hoefou bër,  
 Tortillet endro d'o bisach evel ur torchouer.

Comzomp a verc'het Leon, dindan o c'hoefou bras,  
 Ma vent emesq Tregueris, n'o defe mui a c'hraç;  
 Ar panez zo faticus ouspen ma zint noasus,  
 Car aon bras sur o deveus na vanqe boued d'o zud.

Penevert ma ya Leonis en Treguer da neuta,  
 E c'halfac'h derc'hel ho merc'hed er guêr da azeza;  
 D'azeza ha da zansal qen huel vel o fen,  
 Car Leonis zo potret hac a gar an neud goen.

Ha na deufe qet Leonis en Treguer da neuta,

Ni hon eus marc'hardourien er guêr ouz o frena,  
 Hac o guerz da Leonis, dre ma zint mat ha soupl,  
 Car ar merc'hed a Leon a ne evel neud stoup.

Me vel erfat, va mignon, divalo e parlantet,  
 Ma vec'h cavet e Leon, c'houi a ve divlêvet;  
 Hor merc'hed-ni so agil hac a voar n'em mania,  
 Ur gourach vras o devezs pa gommançont facha.

Me voar ervat, va mignon, int un tamic cruel,  
 Mes ive n'int qet ceder evel merc'hed Treguer;  
 Tout en o c'havàn rustic dindan o c'hoefou bras,  
 Hor merc'hed-ni so ceder ha joaüs o bisach.

Tevel a ri, va mignon, ne c'heus qet tam rêson,  
 Birviquen na pez maouez a escopti Leon:  
 Qemer ur plac'h a Dreguer, ha dalc'h-hi en e renq  
 A ficho dide crampoez da zebri gant læz trenq.

Pa barlantes a grampoez, ganemp-ni en hor bro  
 E zeus calz a Leonis gant neud dre'r marc'hajou,  
 Hac a zaill gant ar c'hrampoez pa ellont o c'havet;  
 Ha c'hoas goude o debri a lip o biziet.

Coll ràn ganet, Tregueriat, n'ellàn mui chom amàn,  
 Poan a ra din em c'halon, me meus aoun e zout clàn,  
 Ma car LÉDAN imprima hon disput var baper,  
 Ni laqayo da c'hoarzin Qerne, Leon, Treguer.

Ar son-mâ so composet evit hoc'h amusi,  
 Ha nonpas evit ma vezo entrezoc'h fachiri:  
 Bezit eta a Dreguer, a Guerne, pe Leon;  
 En em garit etrezoc'h vel a dle peb Breton.

Guechal en em occupet gant calz a chansonniou,  
 Ha n'en em genet morse gant ho follenteziou;

Rac se oll, mar am e'hredit, prenit peb a chanson,  
Ha canit nos ha mintin deus a greiz ho calon.

Pa vec'h e creiz ho labour, occupet hed an de,  
Lezit ho corn ha canit ur chanson vrag neuze:  
Nebeutoc'h e coust certen ha yac'hussoc'h ouspen  
Cana eguet n'eo fumi nac eva gigoden.

Elec'h ma zeo imprimet an diou chanson gôs-mâ,  
E vezo cavet unan evit bep deiz ar bloa;  
Ha ma na vez qet avoalc'h, e vezo ajoutet,  
Evit laqat joaüstet etouez ar Vretonet.

D'an nòs, pa ve assamblat ar famill goude coan,  
Azeet en dro d'an oalet e qichennic an tân,  
Canit pepini d'e dro ur chanson vrag neuze,  
Ha m'en assur e couscot calz guelloc'h goude se.

FIN.



## CHANSON CUPIDON.

*Var un ton anavezet mat.*

**T**OSTAIT, tud yaouanq, da glêvet ur chanson  
A nevez composet var sujet Cupidon,  
Ha me a gonto déc'h darn demeus an effejou  
A brodu peurvuia ebars er galonou.

Ne oun qet eus petra dont d'er gomparachi :  
 N'eo nep lec'h ha partout gouscoude ec'h êri,  
 Nemet oûs an avel, a so oll penetrant,  
 En so er memes tra etouez an dud yaouanq.

Me zo bet pell amzer e clasq dioüal ountâ;  
 P'en deus va surprenet, emeus renqet plega,  
 An objet a garan a verit qementse :  
 N'em bije qeuz ebet, m'hor bijemp liberte.

Mes allas! calz a boan am ho da anduri,  
 Qent m'am bo ar boneur d'allout e fossedi,  
 Mes e creiz va foaniou e teuan da gompren,  
 Etouez a brassa drein vez ar gaera rosen.

Fa voan o studia, m'em boa bet ur guentel  
 Digant ur mignon din hac am gare fidel,  
 Da zioüal va c'halon eus an amourouset,  
 Pe biqen plijadur n'am bije var ar bed.

Ebars en amzer ze ne allenqet credi  
 E vije'n amitie capabl d'am arêti;  
 Hac a greiz va c'halon me-a c'hoarze neuze  
 Da guement a zougue chaden an amitie.

Bremâ e velân sclêr, nespêt d'am imprudanç,  
 Oun forcet da gredi dre va experianç;  
 Venus na vanq james da veza trionfant :  
 Ret eo oboissa, an natur a gommand.

Ma velfes ac'hanòn bremâ, va c'hamarad,  
 Va c'halon languissant, beuzet va daoulagad,  
 Anconac'het ganén an avis saluter  
 A poa bet roet din er guer a Landreguer.

A boan e hall va dorn cundui va fluen,  
 Va speret so troublet ha carguet a anqen,  
 Da avis saluter ne yel qet eus va speret,  
 Mes siouas d'am c'halon, ne meus qet e heuillet.

Vel ur c'hareat fleur goloet a louzou,  
 Eo carguet va c'halon eus a huanadou:  
 Chagrin continuel, abrevet em glac'har,  
 Evel an durzunel pa ve collet he far.

N'en deus den var bed na ne vezo biqen,  
 A oufe expliqa na qenebeut compren  
 Degre an amitie, pa ve parfetamant  
 Unisset a galon entre daou zen yaouanq.

Doctoret a Sorbon hac a Eilosophi  
 Rhetoriq, Seminer hac a Dheoloji,  
 Oll sqient an natur laqet tout en unan  
 Da ober an dra-ze a ve tout re vian.

Va c'halon re dener n'ont qet hac én allo  
 Hep ranna daou anter o clévet ur c'helo:  
 Lavaret e zeus din gant darn va mignonet,  
 Emâ ar goal deodon oc'h ober ur boqet.

Da rêi din va-unan ha d'am mestrez da choas:  
 Dont d'en em separi pe gaout evit partach  
 Eur boqet o deus grêt eus a beder fleuren:  
 Chagrin, melanconi, poan-speret hac anqen.

Arqa, teod miserabl, ha neo qet poent dide  
 Lezel pelloc'h en peoc'h hac en tranqilite  
 An dud yaouanq er vro da rên o yaouanqis,  
 Ha d'en em garout ebars en honestis?

Partout elec'h ma zes te laqa an anqen;  
 Goas out ebars er vro eguet na ze ar vocen;  
 Hac ar c'homzou poezus a roes da bepini  
 Zo capabl da laqat ar vein d'en em zèbri.

Entre tad ha buguel, etre ar breur, ar c'hoar,  
 Etre ar priedou te laqa ar glac'har;  
 Mestrou, domestiqet, qerent ha mignonet,  
 A greis o flijadur te heus o zeparet.

Cléo ar Speret-Santel o parlant er Scritur,  
 E vezo milliguet ar goal deod dinatur,  
 Dre ma laqa malis ha separation  
 Etre tud a veve ebars en union.

Cléo Sant Yan o parlant en e Apocalips,  
 Sant Gregor ha Sant Paul, Doctoret an Ilis,  
 A lavar en devo ar goal dêod da bartach  
 A lenn-ont infernal carguet eus a arrach.

Ha c'houi, tud curius, a dremen vit tud fur,  
 O clêvet goal dêodou, c'houi guemer plijadur;  
 Lennit pis ar Scritur hac e velfot merqet  
 En em rentit coupabl eus ar memes pec'het.

Selaouit Sant Bernard, an abat admirabl,  
 Pe Sant Louis, Roue Franç oc'h instrui e vab;  
 Pa zifenne outàn na roje odianç  
 Da zroug prezec a zen ebars en e brezanç.

Evit conclusion, deoc'h-u, tud curius,  
 Ho pedàn assambles gant an teod bilimus,  
 Da guemer va chanson bremàn evit reglen :  
 Sotoc'h eguet an den avichou er c'helen.

Qent eguet finissa, d'an objet a garàn,  
 Dezi ec'h adressin va c'homzou divezàn :  
 Bezit fidel d'ho qer, me vezo d'am bini,  
 Birviqen goal deodou na ell hor separi.

Ferm evel ur garec er mor ous an tourmant,  
 Mar bezit dìn fidel, me zisquelo patant  
 En em garimp bepret hon daou a vir galon,  
 Despet d'ar goal-dêodou a rên dre ar c'hanton.

Ar men fondamantal demeus an amitie  
 Hon unisso hon daou dre ar c'hraç a Zoue.  
 Speret aoüalc'h oc'h eus evit allout credi  
 Ne zeus victor abet na renquer combati.

FIN.

